



Mar'vonnig Keryell ⁽¹⁾


BUHANTIK (♩ = 100)



E Ker - yell 'zeus eur pla - c'hig, Mar'-von - nig, va



dou - sig! E Ker - yell 'zeus eur pla - c'hig, a



gar va c'ha-lo - nig, a gar va c'ha-lo - nig.

E Keryell 'z eus eur plac'hig,
A gar va c'halonig.

Kaër eo 'vel an heol pa bar,
En hanv var an douar.

Freskoc'h eo eget ar roz
Glebiet gant ar gliz-noz.

He c'horf ker mistr ha ker moan
Vel al lili zo glan.

Bihan ha skañv eo he zroad
Lemm ha glaz he lagad.

He bleo zo hir ha melen
Hag he c'halon laouen.

He sell a zo birvidik
He c'han hini 'n eostik.

He diou jod a zo ruz-wenn
Henvel ouz diou rozenn.

He dent zo vel eur bagad
Oanigou gwenn 'n eur prad.

Gant he halan 'z euz c'hoez vad
Vel gant spern-gwenn ar c'hoad.

Braoa ma vez da welet
Da zul en offern-bred.

Koef dantelez var he fenn
Kroaz arc'hant 'n he c'herc'henn.

En holl barreziou tro dro
N'eus ket eun all er vro.

Ker koant, ker fur ha Mònig
Mar'vonnig, va dousig.

Emaoun krog em ugent vloaz
Soudard e vin varc'hoaz.

Oh ! ra blijo gant Doue
Va diouall en arme.

Ma tizroin ker seder,
Ha m'ouu breman, d'ar gêr.

Ar person hor bædezas
Hor skoulmo neuze c'hoaz.

Dirag aoter hor parrez
Dindan sell ar Werc'hez!

Hag e chomimp unanet
Keit ha ma vimp er bed.

Dirag aoter hor parrez,
Dindan sell ar Werc'hez.

Hag e chomimp unanet
Keit ha ma vimp er bed.

(1) Ar zon-ma eo hini Yvonna Kerizell savet gant F.-M. AN UHEL, nemed eo kreñnet ha kempennet eun tammik, evit ma vezo getlet he c'hana var unan euz an toniou kaëra destumet gant an A. M. DUHAMEL ha nevez embannet gantan en e leor dispar « Kanaouennou Breiz-Izel ». — Prix net, 5 fr., Paris, Rouart, Lerolle et C^{ie}, éditeurs de musique, 29, rue d'Astorg.

Eunig Bihan ar C'hoad (1)

DA VALE (♩ = 100)

The musical score consists of three staves of music. The first staff is in 4/4 time and contains the melody for the first line of lyrics. The second staff is in 5/4 time and contains the melody for the second line of lyrics. The third staff is in 3/4 time and contains the melody for the third line of lyrics. The lyrics are written below the notes.

Eu - nig bi - han ar c'hoad zo di - li - jant a droad,
Zo di - li - jant a droad, Eu - nig bi - han ar c'hoad zo
di - li - jant a droad Eun drô e - vi - don a re - fet? .

« Eunig bihan ar c'hoad zo dilijant a droad,
Zo dilijant a droad,
Eunig bihan ar c'hoad zo dilijant a droad,
Eun dro evidon a refet ?

» Beteg ti va mestrez, eun dro 'vidon 'refet,
Evit anaout he darempred.

— Penaoz e c'hellin-me anaout deoc'h ho mestrez
Pa n'm eus ket he gwelet jamez !

— Oh ! eo, eunig bihan, he anaout a refet,
Diouz he bizaj, dal m'her gwelfet.

» He bizaj a zo gwenn, he daoulagad zo glas,
Ra d'am c'halon plijadur vras !

» He daoulagad zo glas, he bizaj a zo gwenn :
C'houi raï d'ezi va gourc'hemenn... »



(1) Kanet gant *Matelin Herrieu*, Lann-er-Ster, ha moulet el
levr kaër hanvet « *Chansons populaires du pays de Vannes.* »